

KANTIK

savet evit dedi Orgraou iliz Sant Per e Plonger

Var don "Kavet am eus ar peoc'h"

Diskan

O va Doue l'evit gounit ho pennoz,
Evit kaerat m'oc'h hor pedennou
Hag o bleina tre betek ar baradoz,
En hon iliz hon eus savet orgraou.

1

Kaer a dra zur eo peden an tiegez :
Oll daoulinet re vras ha re vihan ;
Kaeroc'h c'hoas eo klevet en iliz parrez
Ar gristenien unanet dre o c'han.

2

Pa oe savet gant ar Roue Salomon
Eun templ dispar e kear Jeruzalem
Evit kaerat lidou an Doue gwirion
E oe eno muzikou a bep ment.

3

Trompilhou sakr, korzennou ha teIennou
A rene mat mouez an oll ganerien ;
Taboultnou, pladennou koevr, kleroniou
A dregerne gant kan ar Juzevien.

4

Iliz Jezuz a ra breman kals gwelloc'h
O lokat son ijinoù ar re gos
En hon orgraou hag o deus mouez pell flouroc'h :
Flour evel mouez eled ar baradoz.

5

Hon orgraou sakr a gaso hor pedennou,
Evel en tour hor c'hlejer benniget,
Da lavaret da Zoue hon ezommou
Kouls vit ar c'haonv, eget an eursted.

6

Da Hanter-Eost, nontek kant seis daou ugent
Eo benniget orgraou neves Plonger.
Ra jomint pell da skara kan ha peden
Ken ma kavimp dor-zigor gant Sant Per !



Imprimerur

J. CADIOU v. g.
Kemper, 31 Gouere 1947

F. LANCHES

Chalon Périquieux
Person Plonger